



### 1 Lenn an destenn.

#### Abegoù beajoù ar Bortugaliz.

C'hoant en doa Dom Enrique, mab ar roue, da c'houzout peseurt douaroù a oa pelloc'h eget enezeg ar C'hanariez [...]. Setu an abeg kentañ.

An eil abeg a oa : ma vefe porzhioù aes da dizhout war an douaroù-se e vefe tu da zegas kalz a varc'hadourezh marc'had-mat betek ar rouantelezh.

An trede abeg e oa ar c'hoant da c'houzout hag-eñ e vefe er broioù-se priñsed kristen [...] evit e sikour a-enep enebourien ar feiz.

Hag ar pevare abeg a oa ar c'hoant da vrudañ ar relijion gatolik.

Diwar G.Eanes de Azura, *Chronique de la conquête et de la Découverte de la Guinée*, XVIvet kantved.

### 2 Respont d'ar goulennoù.

Piv en deus skrivet an destenn ?

---

Peur?

---

Piv eo Dom Enrique?

---

Pet abeg e oa evit beajiñ ?

---

### 3 Liamm.

- |                |   |   |   |
|----------------|---|---|---|
| An abeg kentañ | ● | ● | brudañ ar relijion  |
| An eil abeg    | ● | ● | dizoleiñ douaroù nevez                                      |
| An trede abeg  | ● | ● | kenwerzhañ  |
| Ar pevare abeg | ● | ● | kavout tud katolik evit stourm ouzh ar re n'int ket katolik |